

HC_0013_Nozezh kentañ ma eured

Nozezh kentañ ma eured, me 'm'oa komandamant
Dont da servij ar Roue ret da vezañ kontant

Da serviji ar Republik ret eo oboissant
Ha ma dousig Frañsisañ ne ra ket 'met gouela

"Tevit, tevit, Frañsisañ ! tevit, na ouelit ket
'Benn un daou pe a dri bloaz me teuy c'hoazh d'ho kwelet"

Pasaet an daou, an tri bloaz hag ar pevar ivez / pevar pemp zo ivez
Nag ar martolod yaouank zeu ket tamm da vale

Ar plac'hig a oa yaouank a gave hir he amzer
enoa lakae ba n'he soñj dimeziñ adarre

Dimezet hag eurejet, deus an daol o koania~
N'em gavas ar martolod en ti da c'houl loja

Bonsoir deoc'h matezh vihan, na c'hwi ma lojefe
Me zo martolod yaouank o tistrein deus an arme

O fi nann 'vat emezi amañ vec'h ket lojet
Tud an eured zo deus taol ha ganto omp okupet

Met hemañ oa ur paotr fin ha goût a reas an doare
'eas da gaout an dintin kozh en ur gambr a-gostez

Bonsoir deoc'h-c'hwi tintin kozh na c'hwi ma lojefe
Noz anei ha glav a ra, ha n'ouzon ket p'lec'h monet

Noz eo 'ne'hi ha glav a ra ha n'ouzon pelec'h monet
Ma malizenn war ma choug serten me zo sammet

- o, ya sur 'vat, emezi, amañ vefec'h lojet
En ur gwele mat e bluñv e vec'h lakaet da gousket

Diskennit ho malizenn, ho aour hag ho arc'hant
'Samblez gant tud an eured, o! c'hwi goanio eksellant"

Oa ket debret mat o c'hoan, gant ar rummad kentañ
Hemañ c'houlenn ar c'hartoù evit 'n em zivertisañ

Hemañ c'houlenn ar c'hartoù ! pe an dominoioù
Peotramant plac'h an eured o! da barlantiñ digantañ

"O! ya sur 'vat, emezi, o! biskoazh 'm oa refuzet
Parlant' gant un den yaouank p'avez din permetet"

Hemañ 'gomañs konta dezhi bremañ zo seizh vloaz zo
Pelec'h emañ ma gwalenn aour ha ma diamanchoù

Pelec'h emañ ma gwalenn aour ha ma hini arc'hant
Pezini moa roet deoc'h deus taol ar sakramant.

Hi a joentas he daou zorn ha da sellet deus krec'h
betek bremañ ma doue me moa bevet dinec'h

Betek bremañ ma Doue dinec'h me 'moa bevet.
Dec'h d'an noz me oan intañvez hiziv 'm-eus daou bried

Dec'h d'an noz me oan intañvez hiziv 'm-eus daou bried
Daoust ha gant peshani 'nehe 'in bremañ da gousket

Gant an hini yaoukañ eo gwelloc'h din monet
Egile a ya d'ar ger evel ur c'hazh fouetet